

DISPUT

ETRE EUL LEONARD HAC KUN TREGUERIAT.

Var an ton ancien.

MAR plich ganec'h, selaouit hac e cléfot cans
Ur chanson so compost a nevez er biaoñia,
Zo grêt da zaou zeu yaouanq o devoa speret mat,
Ebars en hostaliri och eva boutaillat.

Al Leonard a c'houleu digant an Tregueriat :
Lavar din me, va mignon, ha te so ur pot mat ;
Evidon-me so agil, ouspen oun mat a grôg,
Rac squaben vad a meus me, alies te pez yod.

Ha me, eme'n Tregueriat, a so soubl a goublou ;
A voar larda va gouzoug g. ut ar granpsezennou :
Va yod a zehrân ive alies coulz ha c'houi ;
Mar och-eus c'hoant da gregui, sortioomp eus an ty.

Nonpas, eme'l Leonard, lezomp an traou-se tout,
Hae evomp peb a vanne da riusa hor gouzoug ;
Ne blich qet din ar gannou, ispecial pa velan
Va goad o tont da redec, e teuân da fatica.

Control, emie'n Tregueriat, pa vezan malicet ;
Ne ran fors evit guelet va goad sñr o redec ;
Potret Treguer zo ajil, fount ec'h ouzont lampet ,
Neus netra ous o ampech, bian eo o lavrec.

Ne choqit qet Leonis gant o bragueyer bras ,
Rac traou eus ar modesta e zint , mär hoe biscoas ;
Neus nicun quer caer guisquet en escopti Treguer
Evel ma zeo Leonis gant o dillat mezer :

Guir avoalc'h a leveres , mat eo sur da rezon ;
Mezer brao zo en Leon , mes gret int difeçon ,
Guisqamanchou Leouis a gavàn divalo ,
An tri fars eus ar goaset a guz oll o bragou .

C'houi, entrezoc'h, Tregueris, ho pragueyer so ourlet
Evel pa vent mailluret en dro d'ho tiou vorzet :
Ho chupennou so flanchet , ho tocou so campet ,
Casimant e zoc'h henvel demeus ar soudaïdet .

C'houi entrezoc'h, Leonis, oc'h eus rochedennou .
A so grët evel sier da zouguen sac'hadoù ;
Ho pléo a so biscoulet , ho tocou distroncet ,
Da zioüal ho tiouscouarn , rac aon na vent chasset .

En an , pa ve pardonniou , me a zo bras souezet ,
O velet merc'het Treguer penos e zint guisquet :
Toul o deus dantelezou en dro d'o c'hoelou bér ,
Tortillet endro d'o bizach evel un torchouer .

Comzomp a verc'het Leon , dindan o c'hoefou bras ,
Ma vent emesq Tregueris , n'o dese mui a c'hras ;
Ar panez zo fatigu ouspen , ma zint noazus ,
Car aon bras o deveus na vanqe boued d'o zud .

Tenevert ma ya Leonis en Treguer da neuta,
Ec'halfac'h derc'hel ho merc'het er guér da azeza;
D'azeza ha da zansal qen huel vel ho sen,
Car Leonis zo potret hac à gar an neud goen.

Ha na deuse qet Leonis en Treguer da neuta,
Ni on eus marc'h dourien er guér ous o frena,
Hac o guerz da Leonis, dre ma zint mat ha soupl,
Car ar merc'het a Leon a ne evel neud stoup.

Me vel erfat, va mighon, divalo e parlantet,
Ma vec'h cavet e Leon c'houi a vé divlévet;
Hor merc'het ni zo ajil hac oar n'em mania,
Ur gourach vras o deveus pa gomançont facha,


Me voar erfat, va mignon, iat un tanic cruel,
Mes ive n'int qet seder evel merc'het Treguer;
Tout en o c'havàn rustiq, dindan o c'hoefou bras,
Hor merc'het ni zo seder ha joaüs ho bizach.

Tevel a ri, va mignon, ne teus sur tam résou,
Birviqen na pe maques a escopti Leon :
Qemer ur plac'h a Dreguer, ha dalc'h-hi er e renq
Aficho dide crampoez da zebri gant lès trenq.

Pa barlantes a grampoez, ganemp ni en hor bro
Ezeus calz a Leonis gant neud dre'r marc'hajou,
Hac a zaill gant ar c'hrampoez pa ellent o c'havet,
Ha c'hoas goude o pebri a lip o bizièt.

Coll a ràn ganet, Tregueriat, n'allan mui chom amang
Poan a ra din em c'halon, me meus aoun ne doqn clàp
Ma car LEDAN imprim'a bon disput var baper,
Elaqayo da c'hoarzin Qerne, Leon, Treguer.

F.I.B.



CHANSON CUPIDON.

Var un ton anavezet.

TOSTAIT, fud yaouanq, da g'êvet ur chanson
A nevez compost var sujet Cupidon,
Ha me a gonto dêc'h darn eus au effejou
A brodu peurvuia ebars er galonou..

Ne oué qet eus petra dont d'er gomparachi :
N'eo e nep lec'h, ba partout gouscoude ee'h êri,
Nemet eus an avel, a so oll penetrant,
Enso er mèmes tra etoues an dud yaouanq.

Me zo bet pell amzer e clas dioüal ountâ ;
P'en deus va surprenet, emeus renget plega ,
An objet a garân a verit qementse :
N'em bije geuz cbet, m'or bijemp liberte.

Mes allas ! calz a boan am bo da anduri ,
Qent m'ambo ar bonheur d'allout e fossedi;
Mes e creis va foaniou e teuan da gompreñ,
Etouez ar brassa drein vez ar gaëra rozepa.

Pa voan o studia , m'em hoa bet ur guentel
Digant ur mignon din hac am gare fidel ,
Da zibüal va c'halon eus an amouroustet ,
Pe bijen plijadur n'am bije var ar bed.

Ebars en amzer ze ne allen qet credé
E vije'n amitie capabl d'am areti ;
Hac a greis va c'halon me a c'hoarze neuze
Da guement a zougue chaden an amitie.

Bremà e velàn sclér , nespet d'am imprudanç ,
Oun forcer da gredi dre va experianç ,
Venus na vanq jaines da veza trionsant a
Bet eo oboissa , an natur a gommard.

Ma velfes ac'hauón brenia , va c'hamarad ,
Va c'halon languissant , beuzet va daoulagad ,
Anconac'bet ganén an avis saluter
A poa bet roet dìn er guér a Landreguer .

A boan e hall va dorm cundai va fluen ,
Va speret so troublet ha carguet a anqen .
Da avis saluter ne yel qet eus va speret ,
Mes , siouas d'am c'halon , ne meus qet e heuillet .

Vel ur c'hareat fleur goloet a louzou ,
Eo carguet va c'halon eus a huanadou :
Chagrin continual , abreuvet em glac'har ,
Evel an durzunel pa ve collet he fan .

N'en deus den var ar hed , na ne vezo biqen ,
▲ oufe expliq̄a na q̄encheut compren
Degre an amitie , pa ve parfetamant
Unisset a galou entre daou zen yaouang ,

Doctoret a Sorbon hac ar Filoſofi ,
Rhetoriq , Seminer hac an Theoloji ;
Oli ſcient an natur laget tout en unan ,
Da ober an dra-ze a ve tout ze vjan .

Va c'halon re dener n'ou qet hac én allo
Hep ranna daou anter o cl̄ivet ur c'helo :
Lavaret e zeus din gant darn va mignonet ,
Emâ ar goel deodou oc'h ober ur boqet .

Da r̄ei din va-unan ha d'am mestrez da choas
Dont d'en em̄ separi pe gaout evit partach
Eur boqet o dens grêt eus a beder fleuren :
Chagrin , melanconi , poan-speret hac angen .

Arça , teod miserabl , ha neo qet poent dide
Lezel pelloe'h én peoe'h hac en tranquilité
An dud yaouang er veo da r̄en o yaouangis ,
Ive d'en em̄ garout ebars en honestis .

Partout elec'h ma zes te laga an angen ;
Goas out ebars er vro eguet na zê ar voces ;
Hac ar c'homzou poezus a roes da bepini
Zo capabl da laqat ar vein d'en em̄ zébri .

Entre tad ha buguel, etre ar breur ar c'heat,
 Etre ar priejou te laqa ar glaç har;
 Mestrou, domestiqtet, qerent ha mignonet,
 A greis o flijadur te heus o zeparet.

Cléo ar Speret-Santel o parlant er Scritur,
 E vezomilliguet ar goel dêot dinatur,
 Dre ma laqa malis ha separation
 Etre tud a vevê ebars en union.

Cléo Sant Yan o parlant en e Apostoliñ,
 Sant Gregor ha Saut Paul, Doctoret an His,
 A lavar en devo ar goel déod da bartach
 A lenn-ont infernal carguet eus a arrach.

Ha c'houi, tud curius, a dremen vit tud sur,
 O clêvet goel dêodou, c'houi guemer plijadur;
 Lennit pis ar Scritur hac e vefot merget
 En em rentit coupabl eus ar memes pec'het.

Selaounit Sant Bernard, an abat admirabl,
 Pe Sant Louis, Roue Franc og'h instrui e vab,
 Pa zifenne outan na roje odianç
 Da zroug prezeg a zen ebars en e brezanc;

Evit conclusion, deoc'h-u, tud curius,
 O pedan assambles gant an téod bilimus,
 Da guemer va chanson bremàn evit réglen;
 Sotoc'h evitan den avichtu er t'heleha.

Qent evit finissa , d'an objet a garan,
 Dezi ec'h adressin ya c'homzou divezan ;
 Bezit fidèl d'o quer , me vezò d'am hini ,
 Birviqen goel deodou na el hor separi .

Ferri evel ur garec er mor ous an tourmant ,
 Mar bezit din fidèl , me zisquelo patant
 En em gafomp bepret hon daou a vir galon ;
 Despet d'ar goel-dêodou a rën dre ar c'hantoni .

Ar men fondamantal demeus an amfie
 Hon unisso hon daou dre ar c'hraç a Zouez
 Speret aofial'h oc'h eus evit allout credi
 Ne zeus victor abet na renjer combati .

FIN.



E Montroulez , e ti LÉDAN , e traou ru ay Vur .